

Ha penaos ober krampoez ?

Ton ar zon-man a zo bet dastumet, e Landudal, e Kerne,
gand an A. F. M.; ar c'homzou a zo bet dastumet, e Kamorz,
evit Dihunamb, gand an Dimezell E. L.

Bourgault Ducoudray a renkas ivez ar zon-man en e
levr: *Mémoires populaires de Basse-Bretagne*.

Allegro vivo 3/4 = ♩

Ker kent ha m' oan di-mezet Al-lon-la-di-ge
da Al-lon-la Al-lon-la-di-ge don Al-lon-
- la Ker kent ha m' oan di-mezet en eur stad trist
voen la-ket Ho-mex En eur stad trist voen la-
- ket

Kerkent ha m' oan dimezet,
En eur stad trist ' voen laket.

Laket ' voen e gwall enkrez,
N'em boa seurt em ziegez.

Paour glez ' oan p'e gwir n'em boa
Em zi, na skudell, na loa!

N'em boa na taol, na listri,
Na tamm ganto da zebri.

Ha penaos ober krampoez,
P'edo va dour er Blanvoez?

Da glask dour e voen kaset,
Gand eur podig pri torret;

Gand eur podig pri torret
Hag eur c'hoz sailh didalet

Va rozell ha va spanell
A oa c'hoaz er c'hoad a-bell.

Va bleud 'oa e Gemene,
Ha va c'hoad e Kemperle.

Ha pa laken kig er pod,
Em boa eun askorn d'am lod;

Me 'n em gave, c'hoaz, ervat
O chom en ti d'her c'hriagnat.

Rak alies, 'vel ar c'hi,
E ven skarzet eus an ti!

Pa 'z een da frita viou
'N deveze dek ha me daou!

Setu, tudou, ar vuhez
A renan em ziegez.

